


KANTIK SANT ERWAN

Diskan :

- Nann, n'eus ket e Breiz, nann, n'eus ket unan,
Nann, n'eus ket eur zant evel sant Erwan.
- 1 N'eus ket en Argoad, na mui en Arvor,
Koulz ha sant Erwan 'vit an dud a vor.
 - 2 Nann, n'eus ket er vro 'vel ma lavarar,
Hag a ve ken mat 'vit al labourer.
 - 3 N'eus ket kaeroc'h skouer d'an dud a lezenn
Eget sant Erwan, skouer ar veleien.
 - 4 Ha d'ar beorien gêz ha d'an dud a boan,
Nann, n'eus ket gwelloc'h eget sant Erwan.

ADOROM HOLL

Adorom holl, e sakramant an Aoter,
Doue kuzet, Jezuz, hor Mestr, hor Zalver.
Sperejou evurus, Elez ar Baradoz,
Gant karantez a d'an meulit-hen deiz ha noz.
Gwir Vab Doue, en em c'hraet den d'hor prena,
En osti sakr oc'h kuzet 'vit hor maga ;
Plijet ganeoc'h skuilha, eus ho tron an aoter,
Warnomp daoulinet amañ ho pennoz, va Zalver.
Enor ha gloar ha karantez da Zoue :
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive ;
Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien
Aketus d'e veuli hirio ha da viken.



KANTIK AR BARADOZ

- | | |
|---|---|
| 1 Jezuz, pegen bras 've
Plijadur an ene,
Pa vez e gras Doue
Hag en e garante. | 4 Gortoz a ra gant joa
An termen diweza :
Mall am eus da welet
Jezuz, va gwir bried. |
| 2 Berr 'kavan an amzer
Hag ar poaniou dister,
O soñjal deiz ha noz
E gloar ar baradoz. | 5 Eürusted hep he far,
Soñjal ennoc'h me 'gar,
C'houi 'ro nerz d'am c'halon
Pa gomez aiken warnom. |
| 3 Pa zellan en neñvo(u).
Etrezek va gwir vro.
Nijal ni a garfen
Evel eur goulmig wenn. | 6 En holl boaniou kalet
A gorf hag a spered,
Me 'zoñjo deiz ha noz
E gloar ar Baradoz. |